

**Troude ha Milin : Ar marvailher brezoneg pe Marvailhou brezoneg**, dastumet gand ar horonal **A. Troude** ha **G. Milin** (ar galleg a zo dirag ar brezoneg). Brest 1870.

Notennou : Modernnaet eo bet an doare-skriva. N'eo ket gwir e vefe galleg e-barz. Skrivet eo gand an dorn al leor a zo bet prestet din gand Skol-Veur Vrést.

**Troude** : Brést 1803 – Brést 1885). Levezonet eo Milin, gwechou 'zo, gand ereadurez ar galleg.

Faziou rannouigou-verb ha reiz an anoïou a zo.

\*

## Fillor sant Per

Gwechall-goz, an Aotrou Doue ha sant Per, o veza eet da ober eur bale dre ar bed, a gavas eur bugel gouezel war an hent.

« Asa ! eme sant Per, peherien ha tud didruez a zo atao war an douar, evid doare, kaer on-eus. Mar deo mez hag iskiz-murbed lezel evel-se eur bugelig paour da vervel evel eur hi bihan ! Daoust ma kasfem ar bugel ganeom ? »

« Mad ! greom eta », eme an Aotrou Doue.

« Perig a rank beza e ano avad. »

« Mad ! », eme an Aotrou Doue.

Hogen Perig a zeuas da veza braz, hag e baeron a lavaras, deiz a oe :

« Poent eo kas va fillor da zeski micher pe vicher pelloh. »

« Kent a ze, eme an Aotrou Doue, lavar da Berig dond amañ ma roin dezañ ar hras a garo da houlenn, a-barz ma'z ay kuit. »

« Goulenn ar baradoz evid da ene, fillor. »

« Ne deo ket pennmoh va leue, eme Berig ; me ne don ket koz c'hoaz. Diwezatoh me hello goulenn pe hounid ar baradoz, mar bez red, pa vezin oh ober va zalarou ha dare da vervel. Evid bremañ eo gwell ganen, a gav din, goulenn kaoud eur marh faro d'am dougen. »

Hag e eo roet unan euz ar re wella dezañ. Ha Perig en hent avad, ken a findalle war gein e varh, el leh ma karje Doue e gas.

Ar pardaez a zeuas, ha Perig ne wele ket, koulz lavared, berad goulou, pa oe mantret o weled eun dra evel eur goabrennig a-ispill oh skourr eur wezenn, ha ken sklêr hag an deiz endro dezi. Ha Perig ha mond an aviz tizoud peg er goabrennig hag he lakaad en e hodell, pa glevas eur vouez o lavared :

« Arabad mond larkoh, paotr, pe az-pezo keuz ! »

Mad ! Mond a reas evelato, ar penn-zod. Ha, goude beza dastumet ar goabrennig en e chakod, ez a en hent adarre.

Evel dre chañs e tegouez kerkent e-harz dor porz eur maner hag e oe degemeret eno ha dalhet da entent ouz ar hezeg.

Hogen o veza ne zeve ket a houlou (rag e goabrennig a lakae ar hraou ken sklêr en noz evel en deiz), Perig a oe tamallet da veza sorser, rag eur mevel all en-doa kemeret gwarizi outañ.

« Korn butun ! lavar da Berig dond amañ, ma welin ha gwir a leverez », eme ar mestr d'an hini a oa bet o flatra Perig.

« N'am-boa-me ket lavaret dit, fillor ? », eme sant Per.

« Eo avad ! », eme Perig d'e baeron.

« Lavaret eh-eus din, eme an aotrou, e ouies ober sklêrijenn heb goulou na tan. Ha gwir eo an dra-ze ? Lavar. »

« Ya da, eme Perig, dre vertuz eur goabrennig a gavjon du-ze er hoad ouz eur skourr, p'edon o tond amañ. »

« Mad ! degas anezi din hebdale ma welin ha te a lavar ar wirionez. »

A-benn eur pennad goude, ar mevel trubard a lavaras d'an aotrou en-doa klevet Perig o lavared e ouie peleh edo kastell Biblenn, eur briñsez kaer ennañ, hag e oa gouest da vond da gerhed ar hastell-ze hag a zo a-ispill a-zioh ar mor war beder chadenn aour, ha da zegas anezañ a-bez.

« Mad ! lavar da Berig dond amañ ma welin ha gwir eo an dra-ze. »

« N'am-boa-me ket lavaret dit, fillor, lezel ar goabrennig el leh m'edo ? »

« Eo avad ! eme Perig d'e baeron... Me ne ouzon ket peleh ema kastell Biblenn, na biskoaz n'am-eus klevet na lavaret meneg diwar e benn. »

« Lavaret eh-eus, eme an aotrou, e oas gouest d'e zegas amañ, priñsez hag all, hag hen ober a rankez pe e vezi krouget. »

Hag ar paotr en hent en eur skrabad e benn, ha gwall ankeniet.

Setu Perig o tond, taol da vor, taol da zouar, en avañtur Doue, pa zegouez gand eul leon, hag eñ kamm-broud hag o vond da bucha e-tal eur wezenn gleuz, hag e oe darbet da Berig koueza d'an douar ken dinerz 'oa eet e galon o weled al leon iskiz-se ken tost all dezañ, ha keid e voue war e ziouskoaz evel hin i e varh faro, ha skrij gweled e zaoulagad evel daou gef-tan en e benn, ha dent braz en e henou.

Evelkent, pa gomprenas oh e lost o ficha hag eñ ken damoezeg<sup>1</sup> ha tra, Perig a zeuas ennañ e-unan hebdale. Neuze al leon, o veza tost da Berig, a zavas eur pao er vann evel pa en-divije c'hoant da lavared ez oa eun dra bennag oh e bistiga.

Gwir 'oa, rag kerkent Perig a welas eur pikol drên e pao al leon. Neuze en em laka, goustata ma hell, da lemel an drên-ze, hag e oe sebezet-marzo o kleved al leon o lavared :

« Bennoz Doue ! va faotrig mad. Ma ez-pefe ezomm ahanon-me eur wech bennag, n'ez-pezo nemed lavared teir gwech ar homzou-mañ : “Roue al leoned, war va ezomm, skoaz din !”, ha ne zalein da zegouezoud ganez. »

« Greom vad atao mar gellom ; droug a raim pa girim ! », eme Perig o vond el leo adarre etrezeg ar mor.

Mad ! degouezoud a reas dre chañs e-tal kastell Biblenn. Perig ne chomas ket da varhata hag hebdale o skei war an nor.

« Petra 'glaskez amañ ivez, paour-kêz reuzeudig ?, eme ar barveg koz a zeuas da zigeri an nor. Emaut degouezet el leh ma varvi. Kee founnuz en-dro raktal, rag truez am-eus ouzit, ken yaouank ma'z out ! »

« O klask... klask a ran... o klask kas ar hastell-mañ d'am mestr pe e vezin lakaet d'ar maro », eme Perig o tenna huanadennou hir, ha beh dezañ o prezeg, rag aon en-doa da veza lazaret gand ar barveg koz.

« Mad ! ne deo ket gwaz dit mervel amañ eged mervel e leh all ivez. Kee 'ta da gaoud ar briñsez. P'am-eus soñj... ne deo ket, arabad c'hoari gand da deod avad, mar gouzoud ober. »

Pa oa eet Perig dirag ar briñsez, hag eñ mond ha tenna e dok ha lavared :

« Demad deoh, priñsez kaerra a zo er bed ! Dond a rafeh-hu da di va mestr-me ? »

« Ne din ket avad, paourig-kêz ! »

« Neuze me vezo lakaet d'ar maro, siwaz din ! » eme fillor sant Per, an daelou en e zaoulagad.

« Kent a ze, eme ar briñsez, mar gellez mond er-mêz euz ar gambr houarn-ze a vezo alhwezet warnout, neuze ez in ganez dihanna, rag truez am-eus ouzit. »

Pa oe bet Perig eur pennad er gambr houarn, e teuas da zoñj dezañ euz ar pez en-doa lavaret dezañ al leon koz m'en-doa tennet eun drên euz e droad.

« Roue al leoned, eme Perig a-benn teir gwech, war va ezomm, skoaz din ! »

---

<sup>1</sup> damoezeg : ?

Hag e-leal, a-veh m'en-doa peurlavaret e gomz diweza, ma klevas Perig eur mestaol war dor e gambr, hag hi toullet treuz-didreuz. Neuze e hellas Perig mond er-mêz, ken braz oa an toull, hag eñ raktal da glask ar briñsez, ker laouen hag an heol.

Houmañ, o weled pebez den 'oa Perig, dre an taol burzuduz-se, a lavaras ez oa mall ganti mond da weled e vestr.

Hag hi en hent raktal, kastell hag all.

An aotrou a oe laouen e galon ha en bade ket pa welas ar briñsez.

« Bremañ, Perig, emezañ, n'ez-pezo labour ebed da ober hiviziken, ha koulskoude ne vanko ket eun oll vad dit. »

An aotrou a zimezas d'ar briñsez, na petra 'ta ! Hogen ne vevas ket pell goude, ha pa oe maro, ar briñsez a lavaras da Berig :

« Petra 'rin-me bremañ ha da beleh ez in-me va-unanig ?... Mar kerez, ni'zimezo en eil d'egile ha ne vezo ket nemeur a zroug, rag me'gave gwall goz va fried diouzin, ha te a zo yaouank ! »

Ker laouen hag an heol benniget, hag e galon o tridal gand ebat en e greiz :

« Priñsez vad, eme Perig, seul kent, seul well<sup>2</sup> ! »

An aotrou sant Per, o veza deut da ober eur bale war an douar adarre, a yeas da weled e fillor, hag en-devoe kant ebat o weled ar vuhez kristen e gwirionez a rene e fillor e kastell Biblenn gand e bried hag e vugaleigou. Hag a-barz mond kuit, e lavaras dezo e raje o gourhemenn d'an Aotrou Doue hag her pedje da lakaad o anoiou war leor ar vuhez.

« Me eo, eme sant Per, a zo eet da leon evid rei skoaz dit ha tenna da bried euz a skilfou Satan a oa bet treh dezi. Kenavezo er baradoz !

---

<sup>2</sup> seul kent, seul well : seul gentoh, seul welloh.